

1012 B. P. France
EUR WERZ HEP HE FAR

A bep seurt gwerziou a vez digaset d'o-omp hag ar c'hals anez-ho a zo mad, de-read e pep doare.

Enn dro-ma ez euz digouezet eur werz ha ne c'houzor ket dre be benn he c'heme-ret, rak c'houez krenv 'zo gant-hi.

Tost oump bet da deuler anez-hi enn tan : hogen, lavaret ez euz d'eomp gant mi-gnoured : « N'e ket ar *C'hourrier* eo hen deuz great ar werz ; lakit atao anez-hi, pep hini a lezo hag a gemero ar pezh a garo... Ret eo diskouez petra c'hell eurspered den ober a-dreuz hag a-sed... Risklomp unan.

Guillamet al loudourenn (183)

N'euz ket pell ebars em c'halon e c'houezaz Lusifer
 Eur c'hoant bras da zastum madou ; mes penôs en
 [em gemer ?

Goude beza sonjet ervad e tenis da *gonklui*
 Ne voa ket a voien gwelloc'h eget dont da zimezi
 Da Willamet al loudourenn a gomanand Rest-ar-
 [C'hi !

Evit kaout eur seurt sonjezon 'voa ret beza trelalet
 Rag n'ez euz ket e Breiz-Izel eur spoutaill 'vel
 [Gwillamet :

He fri ato leun a vutun 'zo evel beg eur gaouenn,
 He diou chod ruz ha kaledet evel diou goz goade-
 [genn,
 Hag he gronch 'vel eur vaz dotu d'he fri a boko
 [soudenn !

He bleo, rust 'vel reün ar gwizi, 'zo e liou ar c'ha-
 [rolez

He dioukouarn plad ha ledan evel kregiga Sant
 [Jabez :

Evel eul forn eo he ginou, he dent 'vel eur goz-
 [rastell ;

Henvel ouz bordou eur pod-kambr eo he diou foul-
 [trenn muzell.

He mouez dous ha melodius evel hini eur porc'hell !

He daoulagad ruz ha skeulfet 'zo pikouzet noz ha de ;
 Pa vez troet unan da Wemgamp, var-zu Brest 'vez
 [egile,

Unan zoken euz he diouvrâch 'vel eur c'hreve (1)
 ['zo gweet ;

He diou c'har evel treid skigner a gôc'h saout 'zo
 [marellet,

Hag he zroid 'vel re ann ouidi enn diabar's 'zo treu-
 [zet.

Eur Zunvez, e ti Willamet, pa gredjon erfin antre
 He c'haviz hi divouchouer, diskabel ha diare'hen
 O skrabat kein eur wiz hudur, moc'h munut enn
 [dro d'ezhi,

Unan zoken var he harlenn sioul bras o voredi,
 Hag ann hoc'h koz o kabouillet er joudourenn
 [gant he fri !

Savet eo bet va c'halon o welet eur seurt malkenn,
 Ha ne c'houienn dare perak var va c'his na zis-
 [trojenn :

Mer ar zonz demeurez he ialc'had eo hen deuz va
 [c'hennerzet,

Ha va zok flour ebars em dourn, diout-hi ez ounn
 [tosteet,

Ha gant eunn ear leun a resped em beuz primm he
 [saludet !

Neuze gant eur vouez kounnaret eo bet savet ar
 [Furi

Enn eur tanfoeltri he forc'hell var greiz leurenñ
 [ann ti :

« Ann d'iaoul gan-hec'h gant ho kôjou, gan-hec'h
 [hag ann holl bôtred ;

« N'eket eur plac'h 'fell d'hec'h-c'houi, mez ar
 [ialc'had a glasket...

« Gant ar foeltr divar va zro-me ! primm, distro-
 [jel, diskampet ! »

P'am beuz klevet ar seurt komsou, n'ounn ket,
 [m'ho ped d'her kredi,

Chommet dirag ar gouillourenn eunn heur da
 [c'hinaouegi :

Dao va zok var va daoulagad : setu me buan er mæz,
 Dizounet mad, mar plij gan-hêc'h, diouz stad ar
 [briedelez ;

Gwelloc'h gan-en debri kentoc'h, 'hed va buez,
 [patatez.